



SON AR ROULEREZED

446

WAR DON : *Eur plac'h yaouank eus a Blouha zo bet dimeet 'wit ar bla.*



Mari vastrouilh gle mont fe- noz



e war daou e war daou u Mari vastrouilh gle mont fe-



noz e war he daou u gent la kloz e war he



daou u. gent la kloz

Mari Vastrouilh gle mont fenez,
 Ewar daou u,
 Ewar daou u,
 Mari Vastrouilh gle mont fenez,
 Ewar he daou-ugent vla kloz. (*Diou wech*).

'Vit hec'h anaout penn-da-benn,
 Red é diskwel,
 Red é diskwel,
 'Vit hec'h anaout penn-da-benn,
 Red é diskwel d'ec'h ar stoden. (*Diou wech*).

War he fenn louz 'zo eur c'hoef brein,
 Ha tammo dru,
 Ha tammo diu,
 War he fenn louz zo eur c'hoef brein,
 Ha tammo druilho war he c'hein. (*Diou wech*).

Eur vroz a gant tamm zo warni,
Hag eul lostenn,
Hag eul lostenn,
Eur vroz a gant tamm zo warni,
Hag eul lostennad fank outi. (*Diou wech*).

Gand he fri sparfel e ve stad,
Pe ve en fons,
Pe ve en fons,

Gand he fri sparfel e ve stad,
Pe ve en fons ar werennad. (*Diou wech*)

Eur penn porc'hel a zo outi,
Ha c'houez ar moc'h,
Ha c'houez ar moc'h,
Eur penn porc'hel a zo outi,
Ha c'houez ar moc'hach zo ganti. (*Diou wech*).

Dindan ar glao, an erc'h e chom
Gant vo he bouc'h,
Gand vo he bouc'h,
Dindan ar glao, an erc'h e chom,
Gand ma vo he bouc'helou tomm. (*Diou wech*).

Kentoc'h 'vit he c'hâd war ma zro,
Rafen eur bern,
Rafen eur bern,
Kentoc'h 'vit he c'hâd war ma zro,
Rafen eur bern kildroenno. (*Diou wech*).

Krenvi a rayo heb dale,
Gand eur pez kof,
Gand eur pez kof,
Krenvi a rayo heb dale,
Gand eur pez kofad 'n eun toufle. (*Diou wech*).

Douaret vo 'n eur parkad hei,
Ha mad awalc'h,
Ha mad awalc'h,
Douaret vo 'n eur parkad hei,
Ha mad awalc'h e vo groet d'ei! (*Diou wech*).

Da gement Vastrouilh gar lounkan,
Vo mad kanan,
Vo mad kanan,
Da gement Vastrouilh gar lounkan,
Vo mad kanan ar sonik-man. (*Diou wech*).

Gab LISKILDY.